



## CONTINUACION

OBERYOU-CAER NAPOLEON-VRAS,

*Abaoue an 8 a vis dû 1806, bete an 8 a c'hoerver  
1807, devez memorabl eus a vataill Eylan.*



Dre F. GUENVEUR.

Var ton *Chanson Potret Plounevez.*

**E**vit ho tiscadurez emeus dija roet  
Sclærigen dêc'h, va broïis, var afferyou brudet,  
Erruet en daou gampagn, e pevar mis amser,  
Pere rento hir-badus hano hon impalër.

Hon haros, en trégont deiz, en eus bet qemeret  
Cals a vroyou, a gæryou, evel hon eus guelet;  
Chetu amâ hanoyou ar plaçou bras nerzus  
Sujedet en amzer-ze var stajou roue Pruss.

Da c'houzout: kêr gapital a zugach Magdebourg,  
Var rivier-vas an Danub, ar gær-vrao a Neubourg,  
Er vro huel eus a Sax, Stetin, Custrin, Spandau,  
Hac er Silesi, Glogau, hac ar plaç a Vreslau.

Er gær hanvet diveza, so cavet mortezou,  
Poult, canolyou, fuzuillou, bombes ha bouledou,  
Avoalc'h evit qemeret daouzec plaç all nerzet,  
En dilac'h hon-armeou, ma vijent bet thomet.

Ar vröyou-ma, emezoc'h, ne anavezomb.ger.  
M'oc'h entent, va brois-ger; mæs pa vo efruet  
Ar yaouanqis en ho bro, goloet a lore,  
E canfet gant plijadur an detaill-ma deze.

Sonch oc'h eus beza lennet e tleze Alexand.  
Distruja hon arme vras qazi en eun instant,  
Ma na vije roue Pruss deut a benn anezi,  
Evel ma voa e greden, qent evit ataqi.

„ Me gao, eme Alexand. brema evel netra,  
„ Gant eun neubeut a gourach. Napoléon bunta.  
„ Evelse, va soudardet, n'en em spouronet qen  
„ P'en em guffet ar vech-ma dirac ar francisien. „

Ar c'homsou-ma so c'hoarzus a c'henou Alexand,  
Dre ma roont da c'houzout die oll patantamant,  
E voe spontet e drouplou en diveza combat  
En affer-gaër Austerlitz, devez a vemor vad.

Brema-souden e velfomp hac int o deus heuillet  
Ar vech-ma avizou eur mestr re aheurtet.  
Mæs discuelomb da guenta c'hoas an impocrizi  
Remerqabl en do-çoni impalaër Russi.

„ Mescomb. eme Alexand, ô va oll sujedet!  
„ Hor supliou a galon; eveldou goulennet,  
„ Eus Gouarner ha Mestr-bras ar rouantelezoù,  
„ Ma teuyo dre vadelez da souten hon armou.

„ Goude pedennou fervant, deut ive gant primdet,  
„ Dre gonfianç en Doue hac en hor soudardet,  
„ E furnes ho general. a bel-so aprouvet,  
„ D'ober ar sacrificou gant ho pro goulennet. „

Chetu ase'r guer gonsou an impalaër Russ  
En e zisclæration evit souten ar Pruss.  
Mæs Doue ar justiq vad, james ne autreas  
Pedennou interesset ar cicanerien vras.

Neuze da sicour ar Pruss e cassas e arme.

Evel ma voant acordet, mæs divezat e voe.  
 Guillou en eus bet affer eus eun den aqedus,  
 Hastif en oll afferyou, dre furnes difus.

Goude ma voe bet gantan armeou Pruss scubet,  
 E getzas da ziarden mi'r russianet,  
 P'ni eus a Austerlitz a c'houlenne revanch,  
 Gant eun esperanç tromplus e divije guell chanch.

Evit mont eus a Verlin var blacen ar gombat,  
 Hon haros a rês buan cant-anter-c'hant leo vad;  
 E ro'antelez Pologn, entre diou rivier-vas,  
 E tleye an arme russ beza distrujet c'hoas.

Goude ma voe bet eno en em fortifiet  
 Dre guement seurt labouryou er brezel pratiqet,  
 E solennizas eur goüel, gant eur joa ridicul;  
 Mæs allas! prestic goude e renqas mont a gul.

O c'hortos ar francisien, pennou-bras an arme  
 A lavare entreze : „ Trec'hi raïmp aneze,  
 „ Rac hon trouplou moustachus a gredomp dre avanç  
 „ Ne vezint qen spouronet dirac *bugale Franç.* „

Hoguen, ar voyen divanq evit nonpas sponta  
 Dirac hon arme vaillant, deze p'en em dosta,  
 A so cavet ar furnez dirazi da dec'het,  
 Ar pèz a voe sicutet gant ar *russianet*.

Hon haroz o ataqas e penn e leonet,  
 Entre'r Bug hac an Nareu, rivierou lavaret;  
 Ha moustachou Alexand ne voent qet pell neuza  
 Oc'h abandoni'r blacen d'eur vanden *bugale*.

Trouplou nombrus, placet mad voa farçus davelet  
 O reded dirac hon re evel tropel deved;  
 Oc'h ober diles gante eus ho magazinou;  
 Col cals demeus abanden, aqipach hac armou.

Dre eun heur vad evito e voa fall ar sazon,  
 Abalamour d'an dra-se e rês Napoléon.

Qemer repos de arme, pa ne alle ruilla  
E c'hianolyou dre'n hentchou, qement a sang a voa.

Partout dre ma tremene an arme russ spontet,  
O tec'hel gant buhander dirac hon harozet,  
E deus lezet ar proufiou eus a vriganderez,  
Dre'n tan, viol ha pillach, ha dre gals muntterez.

An treo-ma so erruet var dro fin mis qerdu;  
Mæs evel ma c'herruas prestic deus a bep tu  
Da zicour an dec'herien, nomb bras eus a vrcudeur,  
E tistrojont var o c'his entro fin mis guenyeur.

En o c'hantoniou gouan e sonje deo surprin  
Hon arme digouraget dre nerz ar yenien;  
Mæs ho dessin voe goelet gant prinç Pontecorvo,  
P'ini, dre urz e chef-bras o chasseas a fo.

Pevarzec mil russian dre eiz mil eus hon re,  
A voe, en affer gaër-ma, broustet rust adate;  
Daou vil trêgont aneze var blacen a chomas,  
Pemp cant a voe prisonet hac ar rest a dec'has.

Neuze, e neubeut amzer, arme ar francisien  
En em gavas rassamblet, e chef-bras en e fen,  
Erruet e ber-amser eus a guær Varsovi,  
D'en em gaout e Vilamberg gant e vrezellidi.

Ar c'henta eus mis c'hoerver e voe apercevet  
Pen-aroc an arme russ varannomp distroet,  
Gant desir d'hon ataqi tost da guær Vilamberg;  
Mæs diaroguet e voe gant an duc-bras a Verg.

Er memes amzer ive, ar general Guyot  
A guemeras kær Gustad d'hon adversour depot;  
C'hoezec cant prisoner russ ha cals a ganolyou,  
Municionou brezel hac o magazinou.

An drivet, deus ar mintin, arme russ poursuet  
Tostic da rivier Vistul a voe goelet renqet;  
Da deir-heur goude creisde voe commanctet ar bal.

E p'ini e voe mèzet evel an ordinal.

Etro pad memes amser, ar general Neï

En devoa ive affer eus eur c'horf enemi,

Pini, eyit sortial eus a gueilladurez,

A deu da glasq e varo dre ar vayonetez.

Souden e voe dismantet qercouls a pourgasset;

C'hozec canon, dec banier en eus abandonet;

Daou vil den emes combat ha c'hoec'h mil prisoner

Zo ar resultat evrus deus ar bemp a c'hoerver.

Ar c'hoec'h, pa voet erruet en qichen kær Glaudau,

E voe guelel adare cals a rujumanchou,

Pere, dre'n duc-bras a Verg a voe souden guintet;

Diou en antier aneze en deveus dastumet.

Ar zeiz, qerqent hac an de e yoat var ho fajou,

Endespet d'argoel-amzer ha d'anerc'h dren hentchou

Rancontret voent adare, e qichen eur c'boat bras;

Cals aneze qemeret ha tri-chant lazet c'hoas.

Hon arme-vras en Eylan goude so erruet

E pe lec'h ive velas arme'r russianet,

Nerzet a gals a drouplou e qichen ar guær-ma,

Ha c'hoas ouspen qement-se placet eur ar guella.

E kær o devoa ive rujumanchou lezet;

Eun ilis hac eur vèred o devoa bardellet,

A belec'h e soutenjont eur gombat ar rusta,

Mæs da zec-heur eus an nos e rencjont diloja.

Prestet oc'h atancion brema bras ha bian,

Da selaou divis bataill, hanvet hini EYLAN,

An terrupla deus ar re bete brema brudet.

Gonezet gant un haroz ne voe biscoas trec'het.

An eisvet, deus ar mintin, pa veljot sclærijen,

E commanchont ataqi dre eur ganonaden;

Bonapart, deus an ilis o devoa dilezet,

A roas de oll drouplou an urzou voa dleet.

An arme russ voa placet var eur mene bihar,  
 Hac ini Napoléon en em gave dindan;  
 Disavantach remercab evit hon harozet,  
 Mæs dre vaillan:is impar o deus e dremenet.

Qent evit eun anter-heur demeus an daou goste  
 E commanchot da denna an eil var eguile;  
 Ar russianet a voa serret e colonen,  
 A guever gant hon arme var hed un anter ten.

Hon toliou a zistruje soudardet arme russ,  
 Hac ho re a rê ive hon trouplou courajus;  
 Rac an douar digompes hac an erc'h a goee  
 O ampechas eur pennat d'allout tostat dêze.

Eur barad erc'h estonus a deuas da ober,  
 Evel ne veljot biscoas o coea eus an ær;  
 An amzer a voa teval, er poent na velet qet,  
 E nep coste d'an arme teir pe beder gamet.

Dre nep seurt tevaligen n'aljot qet cundui  
 Ar bunt a c'houarnamant enep an enemi;  
 Entro pad eun anter-heur meurbet difavorus,  
 Entre ar gombateryen voe ar victor doetus.

Mæs pa deuas an amser goude da veza sclær,  
 Ar general duc a Verg a redas gant herder  
 Enep an enemiet gant e gavaléri,  
 En eur circonstanç pressus, mar boe biscoas ini.

Ar russianet var varc'h en eus souden guintet,  
 Petra benac m'o devoa souten outan clasqet;  
 Al lazerez voe horrubl! diou reguen soudardet,  
 Dre gourach hon harozet a veljot dispennet.

Al lignen-ala stourmas favoret gant eur c'hoat;  
 A vire deus hon trouplou d'alloud outi tostat;  
 Cousegoude dre'r stoc-bras-ma dispar ha surprenus,  
 E voe ditouded ouспен huguent mil soudard russ.  
 Goardon an impalaër diou vech o deus troujet

Arme an enemiet, cant anê voe lazet;  
Mæs, ô courach digompren! en dro dê zo cavet  
Ouspen mil soudard maro deus ar russianet.

Eur victor bet pell doctus erfin voe resolvet,  
Evel m'en devoe Davoust an arme russ troet;  
En ven e clascas goude qemeret adare  
E flaç caër ha profitabl var bladen ar mene.

Collou ar russianet a zo incalculapl,  
Hac ar re hod eus souffret a zo considerapl;  
Tri c'hant gueaulyou tanflammet, renqet en daou  
goste

A lanças daouzec heur vad ar maro aneze.

Hor c'hol-ni a zao, sivoas, da naontec-cant maro,  
Ha demeus ar re vlesset pemp pe c'hoec'h mil var  
dro;

Seiz pe eiz mil russian er blassen zo cavet,  
Hac oll tiez ar c'hanton leun eus a re vlesset.

Daou varnuguent general eus hon enemiet  
Ha nao c'hant dec oficer er vataill zo lazet;  
En eur guir, er vataill-ma ouspen trêgont mil den  
Zo lazet pe prisonet dre nerz ar francisien.

Tud a galonou tener tostaït a speret  
Da blacen al lazêrez, re euzus da velet!  
Eno, var eul leo gare, e veler an douar  
Goloet dre ar mercou deus ar brassa glac'har.

Pemp-varnuguent pez canol a chomas er blâten,  
Gant ho reneryen friqet, cavet en ho c'hichen;  
Ar plaç a voa goarnisset a doqou, casqennou,  
A evach hac a vara, a boult, a vouledou.

Nao pe dec mil corf maro, ha pemp-mil a roncet,  
Pennou, memprou, empennou, a beb coste stringet,  
Syer, tamou fuzulyou ha tamou sabrennou,  
Zo capabl da ispira horrol ar brezellou.

An distruch-ma, eb doetanç, zo crioc'h da vele  
 Var eun douer digompes gant an erc'h goloed ;  
 Rac an treo dû a veler guelloc'h en eun dolen  
 Pa ve ar fônç anezi e pentadurez guen.

Goelomb gant Napoléon borrollyou ar gombat  
 Ha pedomp oll assamblez Mestr-bras ar bed hon Ta  
 Da zigueri daoulagad princet re ostinet,  
 Ma teufont mui da espern buez ho sujedet.

Liez zo deo preposet a beurs Napoléon,  
 Eur peoc'h deziret gantan ha just e pép féçon :  
 Hoguen ar saus fuloret, caus d'an oll valeuryou,  
 A renq, qent evit coea, glac'hari ar vroyou.

Mes dre fermder ha prudanç, chetu-an chassee  
 Deus ar vroyou ma tenne an anter eus e voed ;  
 Chetu eta neantet oll dratic ar sauzon,  
 Qc na vont dibennadet dre nerz Napoléon.

Er Pruss, en Holand, er Spagn evel en Itali.  
 Er Pologn, en Danemarck qercouls hac en Turqi,  
 Evit ar sauzon cruel n'en eus nep porz digor,  
 Qc no devo franchizet dre ol trafic ar mor.

Habitantet a Dreguer, a Guerne, a Leon,  
 Heuillet am eus evidoc'h pajou Napoléon ;  
 Evit ma c'helfet ive, en dio d'hoc'h oalejou  
 Parlant gant ho pugale eus cals e labouryou.

Bete brema, mignonet, na meus netra skrivet  
 A eneb ar viryone dre ol anavezet ;  
 An daou divis diaroc vel ar presant ini,  
 A qement a scrivin c'hoas a ellet da gredi.

F I N.

E MONTRÔULÈS, e ty LÉDAN, e rû ar Vur.